

Disput etre Jakez ha Pipi.

Pipi, greet e zervij a zo deuet dezañ sorhenn
Da vond hep d'ober eun tammig pourmen.
Tapoud 'ra war e chouk e zillad kaer a Vreizad
Kuitaad a ra breudeur, c'hoarezed, mamm ha tad.

Setu skampet ar paotr, leun a vuhez ha yehed
Evid mond d'ar gêr vraz da zeski eun tamm galleg.
Pounner braz e galon, pa'h eo en em gavet eno
'Glev ken med "sale Breton", nemed "Bougre de Mao".

N'eus forz pegen poaniuz e vo gounid ar vuhez
Labourad stard dalhmad en noz kerkoulz hag en deiz,
Tost ha piz 'vel eur preñv ha netra ne hounezo
Arhant ranko bepred dispign 'leiz e hodellou.

'Benn eun nebeud bloaziou, pa zistro d'e vro vihan
Skrivet 'n-eus da Jakez, e vignon mad, e giz-mañ :
Disul me en em gavo, bez eta ouz ma gortoz,
Me arruio er gar en treñ pemp eur diouz an noz.

Jakez 'gerz d'al leh-se a-benn an eur 'oa laret.
Dimeuz an treñ, Pipi e vignon, 'zo diskennet.
En eur laroud en galleg e oa gwall boaniuz beva
Ha 'trezeg egile e kerz 'vit hen briata.

Ar pez e-neus kavet drol gantañ e vignon Jakez
Ez eo gweled Pipi na oa ket evid paouez
Da gomz outañ bepred ha dalhmad ar galleg
Ha tri bloaz a-raog ne ouie 'med brezoneg.

JAKEZ

a gomz
Daoust ha te 'ouifes ken komz en yez da dadou ?
Ar yez, eme Jakez, a gomzes pa 'oas er vro.
Komz din-me er yez-se zo meurbed talvoudeg.
Kloz raktal da henou gand yez Pariz, ar galleg.

PIPI

Gwir eo, mez ar galleg da gomz a zo êzetoh.
Me hen goar bremañ, ha c'hoaz 'karfen hen deski muioh.
Mar karez ma hredi ha dont d'ar broiou pell,

Te a gomzo galleg kerkoulz ha yez Vreiz-Izel.

JAKEZ

Biken, nann, nann, biken ! kleved mad 'rez te, Pipi,
 'Barz ar seurt broiou-ze me n'in evid servija.
 Me gar ma bro, he yez, he stumm, he giziou.
 C'hoant am-eus da veva 'leh eo kousket on zadou.

PIPI

An dra-ze a zo gwir, mez mar karez koulskoude
 Dond ganin da Bariz, evurusoh 'vi bemdez.
 Eno 'weler traou kaer ha kalz a dud a skiant.
 Al labouriou 'vez skañv ha paeet kalz a arhant.

JAKEZ

Lavar din-me hag-eñ az-peus troket da vicher ?
 Me 'gred penaõz 'teus c'hoant da vezañ liver.
 Gouzoud a rez gwall vrao gevier din dont da bentañ,
 En Pariz 'vel leh all, ne vez arhant hep poaniañ.

PIPI

Eno Jakez, raktal te a vefe eun aotrou.
 Eno e vezet laouen, e vezet evuruz tro-dro.
 Prestig goude, 'veldon, eh ankouefes da Vreiz-Izel,
 He yez, he stumm hag oll a yafe gand an avel.

JAKEZ

Ouz da gleved, Pipi, en Pariz 'n em gaver mad.
 Eno moarvad peb den a vez laouen ouz e stad.
 Darn 'm-eus klevet o lared o-defe nemed dienez.
 N'eus 'medout evuruz, n'eo ket gwir 'ta Pipi gêz ?

PIPI

Da gentañ eveldout me zoñje hag a lare,
 Mez bremañ eh on troet rag biskoaz en em buhe'
 N'am-eus evel eno bet c'hoariet ar jeu gaer,
 Ar pez ne ri biken mar chomez 'vel eur Fañch kouër.

JAKEZ

Micher Fañch kouër a zo er vro en dro-mañ ouz ar gentañ.
 Kalz a dud deuz Pariz 'garfe eveldom bevañ.
 Mez eur wech 'vez kerzet, skampel du-ze er mês ar vro,
 Gwell e vez deoh kreñvi evid kaoud hent an distro.

PIPI

Petra 'gavez a vad e-barz da vroig vihan
 Leh n'eus 'med tud dister, nebeud a dud a skiant,

Med bara, krampouez, patatez ha yod ed-du,
Leh n'eus 'med paourente, glahar, trubuill a bep tu.

JAKEZ

Klev 'ta, Pipi : n'eus ket evel eun tammig yod tomm,
Patatez ha krampouez da zerhel eun den 'n e blom.
Gand debraj ar seurt-se 'ver kalz gwelloh fesonet,
Muioh e vez a nerz ha kalz muioh a yehed.

PIPI

Ni dalhmad en Bro-Hall a-raog debri on frejou,
A ya en eur hafe, leh 'vez beb seurt a evajou.
Ha te hag ar re all e-barz ho Pro Vreiz,
N'ho-pez evid eva 'med lêz ha dour a-leiz.

JAKEZ

En dro-mañ 'vad, Pipi, 'lavarez ar wirionez.
N'ez-eus 'med stumm an eva war dud ar hériou fall-ze.
O beg 'vez liou al li¹ gwin, ha ruz e vez beg o fri
Me gred ez oh oll everien, tud prest da beurzodi.

PIPI

Mez koulskoude, Jakez, n'hallez ket lared muioh.
E-barz ar hériou-ze e vez an dud kalz koantoh.
Ar merhed, gwisket kaer, a vez stummet deuz ar hiz.
Ar baotred en aotrou en em wisk gand dillad skiz².

JAKEZ

Mar beh³ eno faro, gand eur chupenn vraz war laez,
Ni e-barz ar vro-mañ meum⁴ dillad iskiz ivez.
Bemdez da labourad botou-koad ha gamachou⁵,
Ar seurt a zouges-te nan-eus ket tri bloaz 'zo.

PIPI

En amzer-ze 'mañ ken, me zo eet er-mêz a gouër.
Dougen 'ran manegou bremañ, pa ran ma micher.
Pa vezan war ma gwetur, krog 'n em skourjez « i hu kokot ! » :
Deus bremañ da Bariz, Jakez, ma n'out ket eur zod.

JAKEZ

¹ li : gwele.

² dilald skiz : dillad brao-kenañ (iskiz)

³ ma vezit (stummm boaz)

⁴ meum : on-eus

⁵ gamachou : baodreou.

Da Bariz ! da zastum a-leiz a gleñvejou braz !
Ha pa deuin d'ar gêr, ma zud ouzin 'vo gwaz !
Nag a zen 'm-eus gwelet o tizrei, brein o halon
Gand bep seurt loustoni, ha se en meur a feson.

PIPI

Gweled a ran Jakez, te nan i biken nebleh.
Nan out ket eveldon, me 'n em gav mad e pep leh.
Mez en bro Breiz-lzel en-keit 'vin war ar bed,
Deuin biken da chom 'keit ma pado yehed.

JAKEZ

Pa 'pezo en Pariz dastumet kleñvejou louz,
Chom, mar plij dit, eno da wellaad peoh ha didrouz.
Na deuez ket amañ da labezañ Breiz-lzel,
Leh n'eus nemed tud hlan ha kalonou uhel.

PIPI

Ma halon 'z-peus beuzet, Jakez, O ! ma gwir vignon.
Deuz Breiz 'teus laret din komzou deuet deuz da galon.
Ya, ar vro-mañ bepred 'zo eur vro dreist-oll dispar.
Pegen evuruz, bremañ en em gavan war an douar.

JAKEZ

Kanom 'ta, ma mignon Pipi, en enor d'on broig Breiz.
Kanom dezi en pep stumm ha meulom anezi a-leiz.
Er vro leh out bet ganet out adarre en em gad⁶,
Ar bugel bet kollet 'zo adarre eur Breizad.

EMILE NICOL (*Tad ar wirionez*)
Miz du 1908.

Emile Jean Marie Nicol (Plouared 31.12. 1866 / Kallag 19.04.1939).

⁶ en em gad : en em gavet.